

DEUT, SPERED SANTEL

Komzou : Visant Seité

Ton: Chapeled a c'hloar (Nn 70)



1. Deut, Spe-red San-tel, euz an neñv, Skuil lit war-nom ho sklê-ri-jenn!
 3. Fre-al-zer dis-par, mi-gnon deom, Le-ve-nez dous an e-ne-ou!
 5. Sklê-ri-jenn gaer, deut da leu-nia Goue-led ka-lon ho tud fi-del!
 7. Gwal-hit, dou-rit ha pa-re-it Ke-ment 'zo louz, ha sec'h, ha klañv!
 9. D'ar re a lak en-noc'h o feiz, Roit ho seiz do-ne-zon zan-tel!



2. Tad ar re baour, do-ne-zo-nour, Sklê-ri-jenn ar c'ha-lo-nou, deut!
 4. Dis-tan er wréz, dis-kuiz er boan, Fre-al-zi-di-gez 'kreiz an doan.
 6. Heb ho si-kour, n'eus dén e-béd Hag a ve-fe pur a be-hed!
 8. Ple-git, hag eeu-nit ha tom-mit Ke-ment 'zo reut ha kamm ha yen!
 10. San-te-lez ha sil-vi-di-gez, Gand al le-ve-nez da vi-ken!

1. Deut, Spered Santel, euz an neñv,
Skuillit warnom ho sklêrijenn !
2. Tad ar re baour, donezonour,
Sklêrijenn ar c'halonou, deut !
3. Frealzer dispar, mignon deom,
Levenez dous an eneou !
4. Distan er wréz, diskuiz er boan,
Frealzidigez 'kreiz an doan.
5. Sklêrijenn gaer, deut da leunia
Goueled kalon ho tud fidel !
6. Heb ho sikour, n'eus dén e-béd
Hag a vefe pur a behed !
7. Gwalhit, dourit ha pareit
Kement 'zo louz, ha sec'h, ha klañv !
8. Plegit, hag eeunit ha tommit
Kement 'zo reut ha kamm ha yen !
9. D'ar re a lak ennoc'h o feiz,
Roit ho seiz donezon zantel !
10. Santelez ha silvidigez,
Gand al levenez da viken !

VIENS, ESPRIT-SAINT

1. Viens, Esprit Saint, du ciel,
Répands sur nous ta lumière!
2. Père des pauvres, donateur,
Lumière des cœurs, viens!
3. Consolateur sans pareil, notre ami,
Douce joie des âmes!
4. Fraicheur dans la chaleur, repos dans la peine,
Consolation au milieu de l'affliction.
5. Belle lumière, viens remplir
Le tréfonds du cœur de vos fidèles!
6. Sans ton aide, personne
Ne serait sans péché !
7. Lave, abreuve et guéris
Ce qui est sale, sec et malade!
8. Assouplis, détords et réchauffe
Ce qui est raide et tordu et froid!
9. A ceux qui mettent leur foi en Toi,
Donne tes sept dons sacrés!
10. Sainteté et salut,
Dans la joie pour toujours!